




**ken vreuriez
AR BREZONEG**

.....

1. an overennou e brezoneg e eskopti Sant-Brieg ha Landreger
2. Overennou en enor d'ar Werhez Vari
- a/ ar pedennou.....1/105
- b/ al lennadennou hag ar salmoù.....10/114
- c/ an aviel.....25/129
- d/ pouellou ar Werhez a-hed ar bloaz.....34/138

.....

Kaierou Kenvreureiz ar Brezoneg.....20 Iur(5 niv.)

KOMZ DOUE EN OVERENN - Levr T.....30 Iur

KOMZ DOUE EN OVERENN - Levr B.....20 lur

KOMZ DOUE EN OVERENN - Levr C.....20 Iur

AR BRIEDELIZ.....8 ltr

AN NOUENN.....8 ltr

LEVR AN OVERENN (embannadur nevez)

o goulenn digand JCB SEITE - skol an aod - 29449 Guissény

C.C.P. 1738-66 Rennes

Troidigeziou aotreet da arnod
evid an eskobti a-berz an Aotrou F.BARBU
eskob Kemper ha Leon

Kemper d'ar 26 a viz gouere 1974

Visant Fave, eskob-skoazeller

Notenn : Roje Abjean a zo o vont da embann eun dibab kantikou galleg evid ar parrezioù e Breiz. War ar stern e-neus ivez eul levrig gand urz an overenn e brezoneg hag eun dibab kantikou brezoneg koz ha nevez. Al levrig-mañ a zo gortozet, abaoe eur pennad mad a zo, gand ar parrezioù.

AN OVERENNOU E BREZONEG

EN ESKOBTI SANT-BRIEG HA LANDREGER

Da genta overennoù-radlo: Gwengamp, Gronvel, Kamlezh, Plesidi, Plevin, Plouaret, Mantallod, Louaneg (1973) Louargad (1974)

A-hend-all, ez eus bet kaset folennoù-enklask, unan dre ganton, el lodenn euz an eskobti ma vez komzet brezoneg. Evel-se ez eus bet greet ivez en daou eskobti all hag embannet on-eus ar pezh a oa war ar respoù.

Med, n'eus deuet endro nemed 20 folenn-enklask, an hanter euz ar re a oa bet kaset. N'eo ket klok eta, pell ahano, ar pezh a embannom.

Overennoù e brezoneg a zo bet gwech pe wech:

E Sant-Nikolaz-ar-Pelem - e Plevin ha Treogom, eur wech an amzer. E Gwengamp (beb miz), e Kallag hag e Karnoet, beb bloaz da geñver pardon Sant Laorañs ha pardon Sant Gweltas. E Boulvriag beb miz, E Landreger.

A-hend all, eh euzer e vez ivez overennoù e brezoneg e Kergrist-Moellou, e Tremargad. Hag al llderêz e brezoneg penn-da-benn, pe dost e Gomenec'h, Louaneg, Bulion ha Kaouenneg, Plufur ha Tremel.

Echu eo ganeom tro an tri eskobti; ar paperioù a jomo evel eun testenl euz stad al llderêz e brezoneg en tri eskobti gand ar bloavezhioù 1973-1974. Ni a garfe goulod lavared n'eus aze nemed eun diblas. E ped all euz or parrezioù, e vefe kontant an dud fidel da gaoud overenn e brezoneg ! Hag e ped all euz on ospitalioù re-goz !

A-benn pemp bloaz amañ e vo gallet ober adarre an enklask hag e vo gwelet pe ez om eet war raog pe war a-dreñv.

TRE PE LANO...? Diêz eo gouzoud war be du ema al lañs... Beza bet eur wech an overenn en eur barrez n'e-neus ket kalz a dalvoudegez evidom. Berz a ra atao eun overenn e brezoneg, evid ar wech kenta; kalz tud a zeu. Med parag e heller lavared evid lod parrezioù "kenta ha diweza embann, dre zispañs", evel ma veze lavaret evid an embannoù-dimezi ?

Ar pezh a gont evidom eo ar parrezioù o-devez overenn e brezoneg meur a wech ar bloaz, lakom beb miz da genta, evid boaza an dud, da hortoz kaoud beb sul, e-leh ma 'z eus div overenn d'an nebeuta, peb-hini a hellfe neuze dibaba hervez e hoant.

War poent-se e heller lavared eo eet an traou war-raog en eskobti Kemper. Meur a barrez a zo hag eo desket mad gand an dud an tonioù nevez evid ar "Kyriale" e brezoneg: Kiria, Gloria, Credo, Sanctus, Agnus Dei; ar hantikou nevez ivez e Brezoneg: e levrigoù Rojer Abjean (Montroulez), e kaver ar halz anezo ha beb bloaz eh hirra ar rol. Amañ hag ahont ar yacuankizou a zav e-unan lazioù-kana ha lazioù-seni, gand gitar ha taboulin, talked o-deus desket mad rei lañs d'ar han ha d'ar bedenn. Euz ar parrezioù tre-war-dre, e teu kalz tud, desevet gand ar haer ma vez al lidoù e brezoneg. Dre gaer eur bet eet d'an dud, n'eus doare all ebed da honid tachenn; an "dre heg" ne hell ket padoud.

O V E R E N N O U E N E N O R d'ar W E R H E Z

L O D E N N G E N T A

KANOU EVID AN DIGOR

Gellet e vefe kemer unan pe unan euz ar hantikou dediet d'ar Werhez,
dreist oïl: Ni ho salud,o leun a hras N° 72 pe el levr-mañ,gand Gouel
ar Rozera.

Ni ho salud,Rouanez an Elez: N° 73
Pegen kaer eo Mamm Jezuz: N° 76
Bemdez beb noz hag e peb ti:N° 79
Gwir vugale ar Werhez:N° 91
Evid Gouel Maria Veurz:N° 96
Evid Ginivelez ar Werhez Vari:N° 95
Evid Gouel Seiz Glahar ar Werhez:N° 97
Evid Gouel Maria Hanter-Eost:N° 98-99

Setu amañ unan all gand ar Salm 44/I.
An diskan war don:Ni ho salud,Rouanez an Elez,
ar poziou war don:O Mamm a garantez:N° 83.

Diskan:
Ni ho salud,c'hwi eo ar Vamm Zantel,
ho-peus ganet ar Roue,Mestr ar Béd,
a gas endro an Neñv hag an douar,
a-oll-viskoaz,bremañ ha da viken.

1. Birvi 'ra em halon
komzou c'hweg ha laouen;
en enor d'ar Roue,
e vo va hanaouern.

2. Gloar da Zoue,an Tad,
d'ar Mab,d'ar Spered Glan,
'vel m'eo bet a-viskoaz,
bremañ ha da viken.

O V E R E N N O U en E N O R d'ar W E R H E Z

war ar bloaz

I SALVE SANCTA PARENS

Kan an digor: Enor deoh, Mamm Zantel, lakeet ho-peus er béd ar Roue a houarn
an neñv hag an douar, epad an amzeriou n'eus fin ebéd dezo.

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, rei deom, ho servicherien,
yehed ar horv hag an ene,
ha dre ar Werhez Vari, oh alvokadi evidom;
roït deom ar hras da veza dizammet diouz poaniou ar béd-mañ,
ha da dañva al levezeg peurbaduz.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh, ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

pe:

Doue Mat dreist peb madèlez,
roït d' ho servicherien ar pardon eus o fehejou,
ha peogwir n'hellom ket ober stad euz on oberou,
ra zeuio pedennou Mamm ho Mab da obten deom ar zilvidigez.

Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue Beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, ra zeuy ho Mab Unganet d'or zikour,
en e vadelez evid an dud;
ha peogwir n'eo ket deuet e Hanedigez
da ober gaou ouz ngwerhded e Vamm, med kentoh d'e zakri,
ra zeuy da renta plijuz deoh ar brovadenn-mañ,
o tieubi ahanom hirio euz or pehejou.

Eñ hag a zo Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

PREFAS EN ENOR D'AR WERHEZ

An Aotrou Doue ganeoh !

Ha gand ho spered !

Ho kalon d'an uhel !

Troet eo warzu Doue !

Lavarom bennoz da Zoue, on Aotrou ! Just ha santel eo !

E gwirionez, just ha santel eo,
Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
ha gand gouel ar Werhez Gloriuz Vari

- ha gand
- gouel Ginivelez ar Werhez Vari
 - gouel ar Werhez Gloriuz Vari
kinniget en Templ
 - gouel Seiz Glahar ar Werhez Vari
 - gouel ar Werhez Vari saludet gand an êl
 - gouel ar Werhez Vari eet da weled
eet da weled Elizabed
 - gouel ar Werhez Vari douget d'an Neñv
 - gouel ar Werhez Vari
konsevet heb pehed

kana deoh meuleudi, gloar, bennoz.

Hi he deus, dre nerz ar Spered Santel, konsevet ho Mab Unganet,
hag en eur vired an enor da jom gwerhez,
he deus roet d'ar béd ar sklerijenn peurbadel,
ar Zalver Jezuz, on Aotrou.

Drezañ eo, Tad Santel, ez oh meulet gand an Elez hag an oll Zent,
ha ganto e fell deom unani or moueziou,
en eur lavared a greiz kalon:

ANTIVONENN AR GOMUNION

Luk. 11/27

Eüruz ar Werhez Vari, he-deus douget en he hreiz Mab an Doue Peurbadel.

GOUDE AR GOMUNION

En eur gemer perz e magadurez an Neñv,
eh aspedom, Aotrou Doue, ho madèlez;
ha peogwir on-eus al levezeg da ober memor euz ar Werhez Vari,
grit deom beza gouest da rei digemer da Vister on Dasprenadur

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

o o o o o o

BEATA ES VIRGO MARIA

KAN AN DIGOR

Eüruz oh, Gwerhez Vari, douget ho-peus Krouer ar Béd a-béz,
lakeet ho-peus er béd an Hini e-neus ho krouet,
ha chom a rit bepred gwerhez.

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, leun a vadèlez, deuit war zikour or zempladurez;
peogwir e reom memor euz ar Werhez Vari,
ra zeuy he fedennou d'or zikour da adsevel euz or pehejou.

Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

En eur renta enor da Vamm ho Mab, ho pedom, Aotrou Doue;
ra zeuy an overenn-mañ da ober ahanom, en ho madelez,
eur brovadenn beurbaduz d'ho kloar.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

PREFAS : pajenn 2GOUDE AR GOMUNION

Kemeret ganeom perz er Zakramant a ro deom ar frankiz,
ho pedom, Aotrou Doue;
peogwir e reom Gouel Mamm ho Mab,
grit deom beza karget euz ho kras,
ha santoud bepred muioh-mui ennom frouez an dasprenadur.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

BENEDICTA ES TU, VIRGO MARIA

KAN AN DIGOR

Benniget oh, Gwerhez Vari, gand Doue, Mestr an Neñvou,
dreist an oll gwragez euz an douar;
biken ne 'z ay da fall e memor an dud,
ar brud euz ar hloar e-neus roet deoh.

Pedom Doue...

Aotrou Doue, peogwir e reom Gouel en enor d'ar Werhez Gloriuz Vari;
grit deom, dre zikour he fedennou,
kaoud lod euz ho kras.

Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

pe

Aotrou Jezuz, c'hwi hag ho-peus dibabet ar Werhez Vari, da vamm,
grit ma hellim, sur euz he gwarez,
enori anezhi, or halon leun a levenez.

Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR PROVOI

En ur gana, leun a levenez, gloar da Vamm ho Mab,
e kinnigom deoh, Aotrou Doue, ar zakrifis-mañ a veuleudi;
grit deom dre an eskemm burzuduz-se,
kemer perz atao muioh en ho Tasprenadur peurbaduz.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

PRE IAS pajenn 2

antivonenn ar gomunion

Luk. 1/48

An oll dud, a-rumm da rumm, Gwerhez Vari, a lavaro ez oh eüruz;
rag an Aotrou e-neus taolet e zellou
war he zervichérez dister.

goude ar gomunion

Pedom Doue...

Maget gand ar Zakramant euz an Neñv, ni ho péd, Aotrou Doue,
d'ar re a rent enor, en deiz-mañ, d'ar Werhez Vari,
roit ar hras da gaoud plas ouz taol
er Rouantelez peurbaduz.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN!

kan an digor

Neñvou, grit d'ar Just dond evel eur blizenn;
ra ziskennou euz ar goabrennou, evel eur glao frouezuz;
ra zigoro an douar ha ma vo ganet anezañ ar Zalver.

pe:

An êl a lavaras da Vari:"Plijet oh da Zoue.
Setu emaoñ o vond da gonsevi
ha da lakaad eur mab ar béd;
anvet e vo mab da Vestr ar béd.

pedenn an digor

Pedom Doue...

Plijet eo ganeoh,Aotrou,e teufe ho Komz,
diwar ar helou digaset gand an êl,
da veza dén e korv ar Werhez Vari,
selaouit ouz or pedennou:
peogwir e kredom eo e gwirionez Mamm da Zoue,
grit ma kavim skoazell dirazoh en he fedennou.

Dre Jezuz Krist,or Zalver.

AMEN!

war ar provou

Aotrou Doue,ra zeuy ho Spered,
hag e-neus e halloud lakeet buez da ziwan e korv ar Werhez Vari,
da zakri ar brovadennou,
on-eus lakeet war hoh aoter.

Dre Jezuz Krist,or Zalver.

AMEN !

prefas pajenn 2

kan ar gomunion

Iz.7/I4

Setu ma konsevo ar Werhez en he hreiz,
ha ma lakay eur mab er béd,
roet dezañ an ano a Emmanuel: "Doue ganeom".

goude ar gomunion

Pedom oll a-unan...

Aotrou,on Doue,ra zeuy ar Gomunion-mañ,
da rei deom gwelloc'h anaoudegez euz ho trugarez,
evid ma kavim en eur lida gand feiz,
ar memor euz ar Werhez Vari,Mamm ho Mab,
ar bromaesa euz ar Zilvidigez,
e Mister ho Mab en em hreet dén.

Dre Jezuz Krist,or Zalver.

AMEN !

Amzer an Nedeleg - Genuit puerpera Regem

kan an digor

Mister souezuz ,donezon dispar !
Eur plah yaouank a laka er béd
ar Roue dezañ eun ano peurbadel;

Chom a ra ganti an enor da veza gwerhez,
hag anaoud a ra al levez da veza mamm.

pe

Gwerhez Vari, Mamm da Zoue,
an hini ne hell ket ar béd a-béz e gronna, (1)
e zouget ho peus en ho kreiz,
evid ma teufe da veza unan ahanom.

pedenn an digor

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg, dre Vister Santez Mari deuet da veza Mamm
ha chomet gwerhez,
ho-peus kinniget d'an dud teñzoriou ar Zilvidigez peurbaduz;
roñt deom ar hras da gompren e teu war or zikour,
an Hini on-eus bet drezi ar joa da zigemer Mestr ar vuez
Jezuz Krist, ho Mba hag on Aotrou,
eñ hag a zo Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken.

AMEN!

war ar provou

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,,
ober digmer vad d'ar brovadenn a zigasom deoh;
deuit da leunia or halonou euz sklerijenn ar Spered Santel,
evid ma ouezim klask ha mired
ar madou kinniget deom ganeoh hoh unan.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

prefas pajenn 2

kan ar gomunion

Yann 1/14

Ar Gomz a zo deuet da veza dén,
deuet eo da jom en on touez.

goude ar gomunion

Pedom Doue...

Renevezet gand Korv ha Gwad ho Komz deuet da veza dén,
e houlennom diganeoh, Aotrou Doue,
ma teuy ar magadur divin-se,
resevet el levenez, o veuli ar Werhez Vari,
da ober deom kaoud perz e natur-Doue, ho Mab.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

Amzer ar Pask - Erant discipuli

kan an digor

Ob. 1/14

Unanet a galon, an Ebestel a gemer perz aketuz er bedenn
gant Mari, Mamm Jezuz. Alleluia !

(1) gronna = envelopper

Pedom...

Aotrou Doue, C'hwi hag ho-peus roet levenez d'ar béd,
oh adsevel a varo da veo Jezuz, ho Mab,
roït deom ar hras dre e Vamm, ar Werhez Vari,
da dizoud, eun deiz, ar Vuez Peurbaduz.

Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

pe

Aotrou Doue, hag ho-peus kaset ar Spered Santel war an Ebestel,
p'edont o pedi, gand Mari, Mamm Jezuz,
roït deom, dre he fedenn,
ar hras da houzoud ho servicha bepred,
ha da labourad dre gomz ha dre skouer,
evid astenn atao ho kloar.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

war ar provou

En eur ober memor euz ar Werhez Vari,
e lakom dirazoh, Aotrou, or provadenn,
hag e houlennom sikour an Hini a zo plijet gantañ,
en em ginnig deoh war ar Halvar,
Jezuz Krist, ho Mab muia karet,
Eñ hag a zo Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a-oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

prefas

pajenn 2

kan ar gomunion

Luk.II/27

Bezït laouen, Mamm zantel da Zoue,
rag ho Mab, beo, a zo deuet er mêz euz ar béz. Alleluia !

goude ar gomunion

Pedom oll a-unan...

Dre ar gomunion-mañ, Aotrou Doue,
kennerzit ar gwir feiz en or halonou,
evid ma vezim evel-se,
goude beza diskleriet eo Mab ar Werhez, gwir dén ha gwir Doue,
salvet dre halloud e Adsao da Veo,
ha ma 'z aim d'al levenez peurbaduz.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

o o o o o o o o

o o o o o o

o o o o

o o

o

P E D E N N O U e v i d O V E R E N N O Ua n I T R O N V A R I APedenn an Digor

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
 rei deom, ho servicherien, yhed ar horv hag an ene,
 ha, dre ar Werhez gloriuz Vari,
 oh alvokadi evidom,
 gras da veza dizammet euz poaniou ar béd-mañ,
 ha da dañva al levenez peurbaduz.

Dre or Zalver Jezuz Krist,
 ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken.

AMEN

War provou

Dre ho madelez, Aotrou Doue,
 ha dre zikour pedennou an Itron Varia bepred Gwerhez,
 ra vo ar provou-mañ talvouduz deom,
 evid kaoud eürusted ha peoh,
 bremañ koulz ha da viken.

Dre Jezuz Krist, or Zalver,

AMEN

Goude ar gomunion

Kemeret ganeom Sakramant ar Zilvidigez,
 ni ho ped, Aotrou Doue,
 ma kavim d'on divenn e peb leh,
 skoazell an Itron Varia bepred gwerhez,
 on-eus, en enor dezi,
 kinniget deoh an overenn -mañ.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN

1. The first part of the report
describes the general situation
of the country and the
state of the economy.

2. The second part of the report
describes the results of the
survey and the conclusions
drawn from it.

3. The third part of the report
describes the results of the
survey and the conclusions
drawn from it. The fourth part
describes the results of the
survey and the conclusions
drawn from it. The fifth part
describes the results of the
survey and the conclusions
drawn from it.

4. The sixth part of the report
describes the results of the
survey and the conclusions
drawn from it.

5. The seventh part of the report
describes the results of the
survey and the conclusions
drawn from it. The eighth part
describes the results of the
survey and the conclusions
drawn from it. The ninth part
describes the results of the
survey and the conclusions
drawn from it.

6. The tenth part of the report
describes the results of the
survey and the conclusions
drawn from it.

7. The eleventh part of the report
describes the results of the
survey and the conclusions
drawn from it. The twelfth part
describes the results of the
survey and the conclusions
drawn from it. The thirteenth part
describes the results of the
survey and the conclusions
drawn from it.

EIL LODENN

A L L E N N A D E N N O U

Er mêz euz an Amzer-Fask

I

enebiez a lakin etre te hag ar vaouez, etre he lignez ha da hini. Gen.8/15

Lennadenn euz Levr Penn-Kenta ar Bed

Gen. 3/9-15,20

9. Emaon-me o vond d'ober emgleo ganeoh-hwl
ha gand ho pugale war ho lersh,
10. hag ouspenn gand kement tra veo 'zo en-dro deoh,
laboused, loened doñv ha gouez,
ar re oll 'zo bet en arh hag ar re a zavo diwarno.
11. Setu eta va emgleo ganeoh:
Biken mui ne vo distrujet an oll draou beo gand dour-beuz,
ha ne zeuio mui an dour-beuz da holei an douar.
12. Ha Doue a lavaras c'hoaz:
- An dra-mañ 'vo merk an emgleo a ran ganeoh
ha gand peb tra veo en-dro deoh,
warhoaz ha bemdez, a-rumm-da-rumm, da virviken.
13. Va hanevedenn a lakan er goabrenn,
da verka an emgleo etrezo^m hag an douar.
14. P'am bo berniet ar houmoul a-zioh an douar,
ha pa baro ar ganevedenn e-kreiz ar houmoul,
15. e teuio soñj din euz va emgleo ganeoh ha gand peb tra veo,
ha ne vo mui dour-beuz da zistruja an oll dud.
20. Hag e roas Adam d'e wreg an ano a Eva,
en abeg m'eo mamm an oll dud veo.

Benniget oh,merh,
gand Doue,Mestr an Neñvou !

- 23bc Benniget oh,gand Doue,Mestr an Neñvou,
dreist an oll gwragez euz an douar.
- 24a ha ra vo benniget an Aotrou,
Krouer an Neñv hag an douar.
- 25abc Hirio e-neus savet ken uhel hoh ano
ma ne deho biken ho meuleudi
diwar muzellou an dud,
a zalho soñj euz nerz an Aotrou da viken.
Evel m'e-neus lavaret d'on Tadou,
e-keñver Abraham hag e lignez da virviken.

2

Abraham a oa o chom,d'ar mare,e Bro-Kaldea.

Lennadenn euz Levr Penn-Kenta ar Bed. Gen.12/1-7

1. Doue a lavar dezañ:
 - Kerz kuit euz da vro,lez war da lersh da familh,ti da dad,
evid mond d'ar vro a ziskouezin dit.
 2. Me a raio ahanout eur vroad vraz a dud,
a vennigo ahanout,a zavo uhel da ano;
drezout e tiskenno war an douar bennoz an neñv.
 3. Me a vennigo an neb a vennigo ahanout
hag a vallozo an hini a zisprizo ahanout;
ennout e vo benniget oll familhou an douar.
 4. Hag Abraham en em lak en hent,
evel m'e-noa Doue kemennet dezañ.
Ha Lot a ya gantañ.
Penzeg vloaz ha tri-ugent eo Abraham,
pa guita kêr Haran.
 5. Kemer a ra gantañ Saraï,e wreg,ha Lot,mab d'e vreur,
e oll vadou hag an dud e-noa bet d'e zervij e Haran,
hag e reont hent evid mond da vro-Ganaan.
 6. Hag e tigouezont er vro-se;
Abraham a dreuz ar vro betek kornad Siken,
beteg dervenn More;ar Gananeaned a veve neuze er vro.
 7. En em ziskouez a ra an Aotrou da Abraham,
hag e lavar dezañ:
 - D'az lignez e roñ an vro-mañ.
- Hag eno e savas Abraham eun aoter d'an Aotrou,
e-noa en em ziskouezet dezañ.

Ken kaer traou e-neus greet evidon

an Hini a zo braz e halloud ha santel e ano.

Luk.I/46-55

46. Ha Mari d'he zro,a lavar:
- Meuleudi a gan va ano d'an Aotrou,
47. ha tridal a ra va spered gand Doue,va Zalver,
48. Ablamour m'e-neus taolet e zellou war e zervichérez dister.
Ya,diwar vremañ an oll dud,a rumm-da-rumm,
a lavara ez on eüruz:
49. ken kaer traou e-neus greet evidon
an Hini 'zo braz e halloud ha santel e ano,
50. hag a skuill e vadelez,a-rumm-da-rumm,war an hini a zouj anezañ.
51. Dispaka 'ra nerz e vreh:skuba an dud leun o halon a vrasoni,
52. diskar ar rouaned diwar o zron ,hag uhellaad an dud izel;
53. ar re o-deus naon a garg a vadou,
ar re binvidig a gas kuit heb netra.
54. E skoazell a ro da Israel,e zervicher,
- rag ne zizoñj ket e vadelez,
55. evel m'e-neus lavaret d'on tadou,
e-keñver Abraham hag e lignez da viken.

Doue a roio dezañ tron David,e dad.

Lennadenn euz Eil Levr Samuel

II Sam.7/1-5,8b-11,16

1. Eur wech greet qantañ e annez en e di,
tra ma roe an Aotrou dezañ ar peoh diouz kostez e oll enebourien,
2. ar roue David e-neus lavaret d'ar profed Natan:
- Sell 'ta Emaon-me o chom en eun ti koad sedr,
hag arh santel Doue 'zo c'hoaz en eun deltenn toet gand krehin.
3. Respont a ra Natan d'ar roue:
- Kement a zoñjez e goueled da galon,
kê d'henn ober,rag an Aotrou 'zo ganit.
4. Med,en nozvez-se end -eeun,an Aotrou a zeu da gomz ouz Natan:
5. - Kê,ha komz ouz David,va zervicher,evelhenn:an dra-mañ a lavar an
Aotrou.N'eo ket te a zavo eun ti din da zond da jom ennañ.
6. Da gemered am-eus,pa 'edos er prajeier da heul an deñved,
evid dallakaad e penn Israel,va fobl.
9. Bez 'on bet ganit e kement tra out bet kroget da ober,
ha skubet am-eus da oll enebourien diwar da dro.
Da ano am-eus iaket da vezañ braz,par d'ar re vrasa war an douar?

10. Va fobl Israel am-eus merket dezi he zachenn,
eleh ma lakin anezi d'ober gwriziou,
eleh m'en em gavo er gêr, hag e vevo dienkreiz,
heb beza gwasket gand paotred an droug evel gwechall,
11. en amzer m'am-boa laket barnerien e penn va fobl Israel.
Ober a ran dit bremañ beva er peoh, goude beza trehet da enebourien.
Ouspenn-ze, a lavar dit an Aotrou:
ema o vond da zevel dit eun tiegez (LIGNEZ).
15. Chom a ray da diegez ha da rouantelez en o zav dirazon da virviken
ha da gador-roue a vo divrall evid atao.

SALM

I Sam.2/1,4-5,6-7;8abcd.

tridal a ra va halon en Aotrou !

1. Tridal a ra va halon en Aotrou,
adsavet eo bet ^{va} nerz gand Doue:
digeri a hellan va genou eneb va enebourien,
rag laouen on gand ho skaozell.
4. An dud kreñv a zo torret o gwareg,
ar re zister a zo deuet nerz en o dargreiz.
5. Ar re o deveze o gwalh a rank klask labour evid kaoud bara,
ar re a varve gand an anon a hell diskuiza;
ar vaouez difeuez a zeu da vezañ ^{mamm} seiz gwech,
an hini he-doa kalz bugale a zeu da wrahad.
6. An Aotrou eo a ro ar maro hag ar vuez,
a laka da ziskenn e bro ar re varo ha da zevel endro.
7. An Aotrou eo a laka da vond da baour ha da zevel da binvidig,
a izella hag a uhella.
8. Tenna a ra euz ar boultrenn an dén kêzig;
diwar an teil e ra d'ar ^{papur} sevel,
evid mond da azeza gand ar pennou-braz
ha kaoud da lod eur gador a hloar.

degaset eo bet eta arh Doue ha roet dezi he flas e-kreiz an deltenn,
e-noa David savet eviti.

Lennadenn euz Levr Kenta an Danevellou

15/3-4,15-16 / 16/1-2

- 15/3. Ar rOue David e-noa grêt boda pobl Israel a-bez e Jeruzalem,
evid lakaad digas arh santel Doue d'ar gêr-se,
el leh kempennet gantañ eviti.
4. Bodet e-noa ivez an dud euz lignez Aaron, da lavared eo ar veleien,
hag ar re a oa euz lignez Levi.
15. Bugale Levi, hervet m'e-noa gourhemennet Moizez diwar gomzou Doue,
a zo lakat da zougen an arh santel,
gand barrinter war o diouskoaz.
16. Ha David a lavar d'ar re 'oa e penn al Levited

lakaad euz o breudeur da ober kan ha muzik,
gand o binvioù-seni, telennou, gitarou ha simbalennou,
evid lakaad da dregerni tonioù a levez.

- 16/1. Digaset eo bet eta arh Doue ha roet dezi he flas,
e-kreiz an deitenn e-noa Doue savet eviti;
sakrifisou peurlasket ha sakrifisou a beoh 'zo bet kinniget.
2. Hag ar roue David, echu gantañ lida ar zakrifisou-se
e-neus benniget ar bobl a-berz an Aotrou Doue.

SALM 112/ 1-2 4-6 7-8

Ra vo meulet ano an Aotrou,
bremañ ha da viken !

1. Alleluia, meulit ,servijerien an Aotrou!
meulit ano an Aotrou !
2. Ra vezo meulet ano an Aotrou,
bremañ ha da viken !
4. Uhel a-uz d'an oll bobloù ema an Aotrou,
a-uz d'an neñvou ema e hloar.
5. Piou a zo par d'an Aotrou Doue ?
troni a ra e barr an neñvou.
6. Hag e stou evid sellad
etrezeg an neñv hag an douar.
7. Euz ar boultrenn e tenn an den ezommeg
hag ar paour diwar an teil,
8. d'ober dezañ azeza e kompagnunez ar briñsed,
e kompagnunez priñsed ar bobl.

5

araog pep tra on bet furmet, e penn-kenta peb tra,
pa ne oa ket a zouar.

Pro.8/23

Lennadenn euz Levr al Lavarioù.

Prov.8/23

22. An Aotrou Doue e-neus roet buez din e penn-kenta euz e oberou,
a-barz m'e-noa grêt netra, a oll viskoaz.
23. Araog peb amzer, on bet furmet, e penn-kenta peb tra,
pa ne oa ket a zouar.
24. Ar morioù don ne oa ket c'hoaz anezo, ha me 'oa ganet;
ne oa ket c'hoaz dour-zavioù (MAMMENNOU) o tarza.
25. A-barz m'eo bet diazezet ar menezioù braz,
araog an torgennou on bet ganet;
26. N'e-noa grêt c'hoaz nag an douar hag ar mêzioù,
na danvez kenta ar bed.
27. Pa gempenne an neñvou, me 'oa eno,
pa stigne kelh an oabl a-zioh gorre ar mor don,
28. pa stage ar hoab'r (HOUMOU), uhel en nêh,
pa zalhe war mammennou an dour,
29. pa verke d'ar mor e harzou, gand divenn d'an dour da vond dreist,
p'edô o startaad diazezoù an douar.

30. En e gichen edon o rén al labour hag e zudi a reen bemdez,
dalhmad o hoari dirazañ,
31. o hoari war voul an douar,
ha va dudi a gavan e-touez bugale an dud.

SALM

44/ 11-12 14-15 16-17

Selaouit,merh,ha sellit mad !
Troit ho skouarn da zelaou.

- II. Selaouit,merh,ha sellit mad,
ha lakit digor ho tiskouarn;
en eur vond kuit,lezit ar zoñj
euz tud ho pobl ha ti ho tad.
12. C'hoant 'neus ahanoh ar roue,
hag ho kened a blij dezañ;
bremañ pa 'z eo Aotrou warnoh,
it da stoui dirazañ.
14. En he haerra,setu o tond,
'barz ar palez merh ar roue,
gwisket ganti dillad neud aour;
he flahed enor 'zo d'he heul.
16. Kaset eo tre e-barz an ti,
e-kreiz ar joa,ar veuleudi.
Hi 'vo rouanez da viken,
e palez kaer 'n Aotrou Doue.

Mari,tron ar Furnez.

Lennadenn euz Levr ar Furnez gand Sirah.

24/1-2,5-7,12-16,26-30

1. Setu Furnez Doue o kana
he meuleudi heh-unan,
oh embann he gloar e-kreiz he fobl.
2. Dirag pobl Doue,mestr ar béd,eo staget da gomz,
dirag an hini oll-halloudeg e tispleg he gloar heh-unan.
3. Euz genou on Doue uhel-meurbed,emezi,on ganet;
an douar a-bez am-eus goloet evel ma ra eur goabrenn.
4. Edon o chom e lein an neñvou,
va hador diazezet war ar.. hounmoul.
7. E-touez an oll boblou am-eus klasket
e peleh kaoud an diskuiz,
e peseurt bro ober va annez.
8. Krouer ar béd e-neus roet urz din,
an hini e-neus va hrouet
e-neus merket din e pe vro mond da Jom.

lavaret e-neus din:

- E-touez bugale Jakob eo dit ober da Jomaj,
e pobl Israel eo dit kaoud da heritaj.

9. A oll-viskoaz, araog peb tra on bet krouet gantañ,
beteg fin ar hantvejou, da viken e chomin beo.
10. En e di santel on bet gantañ o kinnig sakrifisou,
hag evelse da gêr Zion on deuet da jom evid mad.
11. En e gêr muia-karet am-eus kavet an diskuiz,
hag e Jeruzalem ema kalon va rouantelez.
12. Va gwriziou am-eus grêt e-kreiz ar bobl karget a enor,
e tachenn an Aotrou, en e lod heritaj;
beva etouez e dud santel eo va dudl.
19. Deuit davedon, c'hwil oll ho-peus avi d'am havoud:
euz va frouez kemerit ho kwalh;
20. rag soñjal ennon a zo dousoh eged ar mël,
ha kaoud ahanon muioh eged eur podad mël.
21. D'an hini a zebr ahanon, e teuo naon adarre
ha sehed adarre d'an neb a ev ahanon.
22. An neb a zelaou va mouez ne gouezo ket méz warnan,
hag a neb am heuil en e oberou, ne ray ket a behed.

SALM 44

11-12 14-15

Selaouit, merh ha sellit mad,
troit ho skouarn da zelaou.

11. Selaouit, merh, ha sellit mad,
ha lakit digor ho tiskouarn;
en eur vond kuit, lezit ar zoñj
euz tud ho pobl ha ti ho tad.
12. C'hoant 'neus ahanoh ar roue,
hag ho kened a blij dezañ:
bremañ, pa 'z eo Aotrou warnoh,
it da stoui dirazañ.
14. En he haerra, setu o tond,
'barz ar palez merh ar roue,
gwisket ganti dillad neud aour,
he flahed enor 'zo d'he heul.
16. Kaset eo tre e-barz an ti,
e-kreiz ar joa, ar veuleudi.
Hi 'vo rouanez da viken,
e palez kaer 'n Aotrou Doue.

eur werhez a gousevo hag a vo mamm d'eur mab.

Lennadenn euz Levr ar Profed Izaiaz.

7/10-14

10. Evelhenn e komze an Aotrou Doue ouz Akaz, roue Bro-Juda:
11. - Goulenn digand an Aotrou, da Zoue, eur zin burzuduz,
ha pa ve dindan an douar, e bro ar re varo, pe e lein an neñv.

12. Akaz a respont:
- Ne houlennin netra,
ne fell ket din amproui an Aotrou.
13. Neuze e lavar Izaiaz:
- Klevit 'ta, bugale David,
ha n'eo ket awalh deoh skuiza va Doue ivez ?
14. Ablamour da-ze, ema an Aotrou Doue o vond da rei deoh eur zin:
setu e konsevo ar werhez hag e vo mamm d'eur mab,
a vo anvet Emmanuel (da lavared eo: Doue-ganeom).

SALM

I Samuel 2/1, 4-5 6-7

tridal a ra va halon en Aotrou !

1. Tridal a ra va halon en Aotrou,
adsavet eo bet va nerz gand Doue.
Digeri a hellan va genou eneb va enebourien,
rag laouen on gand ho skoazell.
4. An dud kreñv a zo torret o gwareg,
ar re zister a zo deuet nerz en o dargreiz.
5. Ar re deveze o gwalh a rank klask labour evid kaoud bara,
ar re a varve gand an naon a hell diskuiza.
Ar vacuez difrouez a zeu da veza mamm seiz gwech,
an hini he-doa kalz bugale a zeu da wrahad.
6. An Aotrou eo a ro ar maro hag ar vuez,
a laka da ziskenn e bro ar re varo ha da zevel endro.
7. An Aotrou eo a laka da vond da baour ha da zevel binvidig,
a izella hag a uhella.
8. Tenna a ra euz ar bouldrenn an dén kêzig,
diwar an teil e ra d'ar paour sevel,
evid mond da azeza gand ar pennoù braz
ha kaoud da lod eur gador a hloar.

evidon ez eus ganet eur hrouadur hag a vo Roue ar peoh.

Lennadenn euz ar Profed Izaiaz.

9/ 1- 6

1. Ar bobl a gerze en deñvalijenn he-neus gwelet eur sklerijenn vraz.
An dud a oa o chom er vro deñval a zo paret an deiz warno.
2. Kresket ho-peus al levezeg, joa vraz ho-peus skuillet:
emaint o tridal dirazoh,
evel an eosterien, pa vez echu an eost,
evel ar zoudarded eet an treh ganto,
pa rannont etrezo ar preiz dastumet.
3. Rag ar yoc'h a boueze war o choug,
ar vaz a vloñse o diskoaz,
ar wialenn a skoe ganto evid o bounta d'al labour,
kement-se ho-peus brevet,
evel en deiz ma oa bet trehet Madian.

4. Ar boutoù pounner a dregerne an douar ganto,
ar mantilli ruziet gand gwad,
setu int devet, lonket gand an tan.
5. Ya, pegwir ez eus ganet eur hrouadur evidom,
ez eus roet deom eur mab;
merk e halloud war e skoaz; evelhenn e vo anvet:
Kuzulier burzuduz, Doue kreñv, Tad da viken, Roue ar peoh.
6. War astenn ez ay e halloud
ha ne vo fin ebed ken d'ar peoh,
war gador David hag en e rouantelez.
Stard e vo harpet war ar gwir hag ar justis,
a-vremañ da vrviken.
Setu petra 'vo greet gand karantez entanet an Aotrou,
Mestr ar béd.

SALM 112 1-2 4-6 7-8

Ra vo meulet ano an Aotrou,
bremañ ha da viken.

1. Alleluia, meulit, servijerien an Aotrou !
meulit ano an Aotrou !
2. Ra vezo meulet ano an Aotrou,
bremañ ha da viken.
4. Uhel a-uz d'an oll boblou ema an Aotrou,
a-uz d'an neñvou ema e hloar.
5. Piou a zo par d'an Aotrou Doue ?
troni a ra e barr an Neñvou.
6. Hag e stou evid selled
etrezeg an neñv hag an douar.
7. Euz ar boultrenn e tenn an den ezommeg
hag ar paour diwar an teil,
8. d'ober dezañ azeza e kompagnunez ar briñsed,
e kompagnunez priñsed ar bobl.

tridal a ran gand al levenez en Aotrou.

Lennadenn euz Levr ar Profed Izaiaz. 61/9-11

9. O gouenn a vo skignet ar brud anezi dre vroioù ar béd,
hag o bugale a vo anavezet e-touez an oll boblou.
10. Levenez, estlamm am-eus gand an Aotrou,
ha tridal a ra va halon e va Doue.
Laket er-neus warnon gwiskamant ar zilvidigezh
ha mantell ar justis,
par d'eur pried nevez gand e zeizenn,
ha d'eur wreg nevez gand e bizou.
11. Rag evel ma teu kellid d'ar greun taolet en douar
ha ma tiwan an had el liorz,
ken sur all e lako an Aotrou Doue da ziwan hadenn ar zilvidigezh,
a roio gloar dezañ dirag an oll boblou.

SALM

I Sam. 2/1,4-5,6-7,8 abcd

Gouenn va zud fidel a vo brudet e-touez ar broadou
hag o bugale anavezet e-touez an oll boblou.

gweloud oferenn niverenn 7 pajenn 16/120

IO

promesa ar Zalver a vo ganet e Betleem.

Lennadenn euz Levr ar Profed Mikeaz 5/2-5a

1. Ha te, Betleem Efrata,
kêrig dister e-touez mil kêr Bro-Juda,
euz da greiz e savo evidon
an-dên galvet da veza e penn Israel;
e ouenn a zo anezhi euz a wechall, en mazeriou pella.
2. Rag-se e lezo Doue e bobl da veza er boan
beteg ma vo deuet
evid ar vaouez a dle kaoud eur mab
ar mare d'e lakaad er béd;
ha neuze e tistroio ar rest euz e vreudeur
daved bugale Israel.
3. Eñ a vo sonn en e zav evid ober e labour a bastor;
gantañ e vo nerz an Aotrou,
ha gloar uhel-meurbed e Zoue;
e dud a vevo dienkrez, rag eñ a vo braz,
beteg pennou pella ar béd.
- 4a. Hag eñ a vo ar pech.

SALM 112

1-2,4-6,7-8

gweloud an oferenn 8, pajenn araog.

II

bezi^t, laouen, merh Sion,
setu^m emaon o tond

Lennadenn euz Levr ar Profed Zakariaz

2/10-13 (hebr 14-17)

14. Ra drido ho kalon,
bezi^t laouen, merh Sion:
- Emaon o tond da jom en ho kreiz.
Lavar an Aotrou eo.
15. Poblou niveruz a droio o halonou
ouz an Aotrou, en deiz-se,
ha pobl
din e vezint.

Me 'vo o chom en ho kreiz,
ha c'hwi a ouezo eo an Aotrou,
mestr an Neñvou, e-neus va haset davedoh.

20/124

16. An Aotrou a vo bro-Juda en e gerz,
evid e lod en douar santel,
hag ar gêr a zibabo a vo adarre Jeruzalem.
17. Roit peoh dirag an Aotrou, c'hwi oll ar grouadurien,
rag ema o tond er mêz euz e di santel.

SALM

Luk.1/46-47 48-49 50-51 52-53 54-55

Eüruz oh-hwi, Gwerhez Vari,
ho-peus douget Mab an Tad Eternel!

46. Goude salud Elizabet, Mari, d'he zro, a lavar:
- Meuleudi a gan va ene d'an Aotrou.
47. ha tridal a ra va spered gand Doue, va Zalver.
48. Ablamour m'e-neus taolet e zellou war e zervichérez dister.
Ya, diwar vremañ an oll dud, a-rumm-da-rumm,
a lavaro ez on eüruz:
49. ken kaer traou e-neus grêt evidon
an Hini 'zo braz e halloud ha santel e ano.
50. Hag e skuill e vadelez a-rumm-da-rumm, war an dud a zouj anezañ.
51. Dispaka 'ra nerz e vreh: skuba an dud leun o halon a vrason!
52. Diskar ar rouaned diwar o zron, hag uhellaad an dud izel;
53. ar re o-deus naon a garg a vadou,
ar re binvidig a gas kuit heb netra.
54. E skoazell a ro da Israel, e zervicher,
rag ne zizoñj ket e vadelez,
55. evel m'e-neus bet lavaret d'on tadou,
e-keñver Abraham hag e liguez da viken.

), () (

()

epad an Amzer-FaskA. Testennoù evid al lennadenn gentañ

I

derhel a reent da bedi aketuz, en o zouez Mari, Mamm Jezuz

Lennadenn euz Levr Oberou an Ebestel 1/12-14

12. Goude ma oa pignet Jezuz d'an Neñv,
an Ebestel a zistro da Jeruzalem euz Menez an Olived,
nepell ahano, eun deveziad-bale, da zeiz ar Zabad.
13. Erruet e kêr, e pignont er zal d'an neh,
ma oant boaz d'en em voda enni,
Aze ema Pêr, Jakez, Yann, Andre, Filip ha Tomaz,
Bartelemi ha Maze, Jakez, mab Alfe,
Simon ha Jud, mab Jakez.
14. Oll a-unan, e talhont da bedi aketuz,
gand eun nebeud merhed,
en o zouez Mari, mamm Jezuz, ha gand e vreudeur.

SALM

LUK. 1/46-47 48-49 50-51 52-53 54-55

Eüruz oh-hwi, Gwerhez Vari,
ho-peus douget mab an Tad Peurbadel.

lenn ar gwerzennoù war bajenn araog.

2

eur zin burzuduz a zo bet gwelet en neñv.

Lennadenn euz Levr an Diskuliadur gand an Abostol Sant Yann

Apoc. 11/19a

12/1, 3-6a

10/ab

- 11/19 En deiz-se, an Aotrou Doue a oa digor e dempl a zo en neñv,
hag e weled ennañ arh santel e emgleo.
- 12/1 Eur zin burzuduz a zo bet gwelet en neñv:
eur vaouez gand an heol ouz he gwiska, al loar dindan he zreid,
ha war he fenn eur gurunenn a zaouzeg steredenn.
- 2 Dougérez e oa, ha krial a ree forz,
gwasket gand ar boan o lakaad he hrouadur er béd.

3. Ur zin all a zo bet gwelet en neñv:
bez 'e oa eun aerouant (DRAGON) braz, liou ruz-tan warnañ,
seiz penn ha dek korn dezañ, ha war e bennou seiz kurunenn;
4. skubet e-neus gand e lost an drederenn euz stered an oabl,
ha stlapet anezo war an douar.
Chom a ra an aerouant a-zav dirag ar vaouez dare da henel,
evid lonka ar hrouadur kerkent ha ganet.
5. Laket he-deus er bed eur mab, eur paotr,
an hini a dle beza pastor an oll boblou, eur walenn-houarn en e zorn;
hag eo bet ar bugel tehnet kuit ha douget daved Doue ha daved e dron.
6. Hag ar vaouez a zo tehet kuit beteg ar goueleh (DEZERD),
e-leh m'he-deus eur plas kempennet dezi gand Doue.
10. Klevet am-eus en neñv eur youez kreñv, hag a lavare:
- Bremañ eo deuet da vad silvidigez, herz ha rouantelezh on Doue,
ha galloud meur e Zalver (E GRIST).

SALM 44 11-12 14-15 16-17

Selaouit, merh, ha sellit mad,
ha bezit digor ho tiskouarn.

11. Selaouit, merh, ha sellit mad
ha digorit ho tiskouarn:
en eur vond kuit, lezit ar zoni
euz tud ho pobl ha ti ho tad.
12. C'hoant 'neus ahanoh ar Roue,
rag ho kened a blij dezañ,
Bremañ pa 'z eo Aotrou warnoh,
it 'ta da stouf dirazañ.
14. En he haerra, setu o tond,
'barz ar palez merh ar roue,
gwisket ganti dillad neud aour;
he flahed enor 'zo d'he heul.
16. Kaset eo tre e-barz an ti,
e-kreiz ar joa, ar veuleudi.
Hi 'vo rouanez da viken,
e palez kaer 'n Aotrou Doue.

me a welas ar Gêr Zantel, Jeruzalem nevez, kempennet evel eur
wreg nevez fichet evid he gwaz.

Lennadenn euz Levr an Diskuliadur gand an Abostol Sant Yann. 21/1-5a

1. En deiziou-se, eme Yann, am eus gwelet eun neñv nevez,
hag eun douar nevez,
rag an douar kenta hag an neñv kenta a oa eet ebliou (DA GET),
hag ar mor n'eus mui anezañ.
2. Ha me, Yann, am eus gwelet ar Gêr Zantel, Jeruzalem nevez,

o tiskenn euz an neñv, a gichen Doue,

kempennet evel eur wreg nevez fichet evid he gwaz.

3. Ha klevet am eus eur vouez kreñv o tond euz an traoñ, hag a lavare:

Setu demeurañs Doue gand an dud, bez 'e vo o chom ganto,
int a vo e bobl, ha Doue e-unan a vo ganto.

4. Seha a raio Doue an oïl daelou euz o daoulagad,

hag ar maro ne vo mui anezañ;

ne vo mui na kañv, na klemm, na poan,

rag ar béd kenta a vo eet ebïou (DA GET).

5. Hag an hini 'oa azezet war an tron e-neus lavaret:

- Setu emañ oh ober nevez peb tra.

SALM

Judit 13/23bc - 24 25abc

C'hwi 'zo enor or gouenn

23bc Benniget oh, va merh, gand^{an} Doue uhel-meurbéd,
dreist-holl gwragez an douar.

24. Meulet ra vezo an Aotrou,
Krouer an neñv hag an douar.

25. Ya, hirio e-neus savet ken uhel hoh aïo,
ma ne deho biken ho meuleudi,
diwar muzellou an dud,
a zalho soñj euz nerz an Aotrou evid atao.

B - testennoù evid an eil lennadenn

I

el leh m'eo bet puill ar pehed,
eo bet puilloh c'hoaz ar hras.

Rom.5/20

Lennadenn euz Lizer Sant Paol d'ar Romaned. 5/12, 17-19

12. Dre eun dén hebken, Adam, eo deuet ar pehed er béd,
ha, dre ar pehed, ar maro;
evel-se ar maro e-neus taget an oïl dud,
dre m'o-deus oïl pehet.

17. Dre-ze, evel m'eo deuet dre unan hebken,
dre faot unan hebken, ar maro da ren,
e teuio, muïch c'hoaz, ar re a reseo puill, donezon gras Doue
da ren dre unan hebken, dre Jezuz Krist.

18. Setu eta, evel m'eo bet kondaonet an oïl dre faot unan hebken,
evel-se ivez ar justis gounezet gand unan hebken,
a zigas d'an oïl eur justis a ro buez.

9. Evel m'eo deuet an oll da vezañ peherfen,
dre zizentidigez unan hebken,
evel-se ivez e vo santelleet an oll,
dre zentidigez unan hebken.

2

ar re e-neus galvet,e-neus greet anezo dibeh.

Lennadenn euz Lizer Sant Paol d'ar Romaned. 8/28-30

28. Va breudeur,
evid an dud a gar Doue,
n'hoar e tro peb tra evid o mad,
o veza m'int bet galvet hervez e venoz a garantez.
29. O anavezet e-neus a oll viskoaz,
hag o dibabet da zond da veza heñvel ouz e Vab,
evid ma vo hemañ ar henta ganet euz kalz a vreudeur.
30. Ar re e-neus dibabet,e-neus ive galvet (d'ar feiz);
ar re e-neus galvet,e-neus greet anezo dibeh;
ar re e-neus greet dibeh,e-neus roet dezo e hloar.

3

Doue e-neus kaset e Vab,a zo en em hreet
mab eur vaouez.

Lennadenn euz Lizer Sant Paol d'ar Halated 4/4-7

4. Pa 'z eo bet peurechu an amzer merket,
Doue e-neus kaset e Vab,
a zo en em hreet mab d'eur vaouez,e-neus pleget d'al Lezenn,
5. evid dasprena an dud a oa dindan yeo al Lezenn,
evid ma vefem kemeret da vugale gand Doue.
6. O veza ma 'z oh e vugale,e-neus Doue digaset en ho kalonou,
Spered e Vab,a zo o. krial:Abba ! Tad !
7. Ha setu n'out ket mui servicher (MEVEL),med mab dezañ,
hag o veza mab,ez out heritour ive,dre hras Doue.

4

Doue e-neus choazet ahanom,en Aotrou Krist,
a-barz m'oa krouet ar béd.

Lennadenn euz Lizer Sant Paol da gristenien Efez. 1/3-6,11-12

3. Meulet ra vo Doue,Tad Jezuz Krist,on Aotrou !
Euz lein anNeñv,e-neus karget ahanom
a beb seurd bennoziou speredel en Aotrou Krist.
4. Er Zalver-se e-noa choazet ahanom a-barz ma oa krouet ar béd,
evid beza santel ha dinamm dirazañ,er garantez.

evid an aviel

5. Divizet e-noa a viskoaz ober ahanom e vugale,
dre Jezuz Krist hag evid beza unanet gantañ,
ha kement-se hervez m'eo bet plijet gand e vadelez,
6. evid rei tro da veuli splannder ar hras dispar,
e-neus roet deom, dre garantez nemedkén, en e Vab karet.
11. Er Hrist, ni ar Juzevien, a oa bet rakdibabet da veza e lod,
hervez diviz an Hini a gas peb tra war-raog,
diouz mennad e youl,
12. evid ma vefe meulet e hloar ganeom-ni,
ar re o-deus a-ziaaraog esperet er Hrist.

C. testennou evid an aviel

AN AVIEL

ALLELUIA

Eüruz oh, Mari, Mamm
Gwerhez Santel,
ha teir gwech din a beb meuleudi,
rag m'eo savet diwarnoh Heol ar justis,
ar Hrist, ,on Doue !

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze. 1/1-16 18-23 krennet 18-23

1. Chadennad tadou Jezuz Krist, mab da Zavid, mab da Abraham.
2. Abraham a zo bet tad da Izaag, Izaag da Jakob,
Jakob da Juda ha d'e vreudeur.
3. Juda a zo bet tad da Farez ha da Zara, dre ar vaouez Tamar,
Farez, tad da Esron, Esron da Aram,
4. Aram tad da Aminadab, Aminadab da Naason, Naason da Zalmon,
5. Salmon tad da Booz, dre ar vaouez Rahab,
Booz tad da Obed, dre ar vaouez Ruth, hag Obed da Jese.
6. Jese a zo bet tad d'ar roue David,
ha David tad da Salomon, dre an hini a oa bet gwreg Uri.
7. Salomon a zo bet tad da Roboam, Roboam da Abiaz, Abiaz da Asaf,
8. Asaf tad da Jozafad, Jozafad da Joram, Joram da Oziaz.
9. Oziaz, tad da Joatam, Joatam da Akaz, Akaz da Ezekiaz.
10. Ezekiaz, tad da Vanase, Manase da Amon, Amon da Joziaz.
11. Joziaz tad da Jekoniaz ha d'e vreudeur, da vare^{an} harlu e Babilon.
12. Ha goude an harlu e Babilon, Jekoniaz a zo bet tad da Zalatiel,
Salatiel da Zorobabel,
13. Zorobabel, tad da Abiud, Abiud tad da Eliakim, Eliakim da Azor,
15. Azor, tad da Zadok, Sadok da Akim, Akim da Eliud,
16. Eliud tad da Eleazar, Eleazar da Vatan, Matan da Jakob.

16. Jakob a zo bet tad da Joseph, pried Mari,
an hini 'zo bet mamm da Jezuz, anvet ar Krist(ar Zalver).
17. Bez 'ez eus eta pevarzeg rummad euz Abraham beteg David,
pevarzeg euz David beteg harlu Babilon,
ha pevarzeg euz an harlu e Babilon beteg ar Zalver.

amañ e kroger gand al lennadenn diverret:
18. Ganedigez Jezuz Krist a zo bet erruet evelhenn.
Pa oa Mari, e vamm, dimezet da Jozef,
med a-barz m'o-doa bevet asamblez,
eo bet anavezet e oa dougêréz dre vertuz ar Spered Santel.
19. Jozef, he fried, dén santel ha mad anezañ,
pa ne'felleket dezañ he dizenori,
e-neus laket en e benn dispartia diouti dre guz.
20. Troet e-neus^{ar} zoñjoù-se en e spered,
pa zeu eun El d'an Aotrou
d'en em ziskouez dirazañ, e-kreiz e gousk,
o lavared dezañ: "Jozef, mab da Zavid, arabad deoh kaoud aon
o kemer Mari, ho pried, en ho ti,
pegwir ar pezh a zo krouet enni a zo euz ar Spered Santel.
21. Genel a raio eur mab,
a rooh dezañ an ano a Jezuz,
rag eñ eo a zalvo e bobl euz e fehejou.
22. Kement-se a c'hoarveze evid ma teufe da wir
ar pezh e-noa lavaret an Aotrou, dre vouez ar profed:
23. - Setu e vo eur werhez dougêréz hag e vo mamm d'eur mab,
a vo anvet Emmanouel, da lavaroud eo: Doue-ganeom.
24. Jozef, goude beza savet,
a ra neuze evel m'e-neus lavaret dezañ an Aotrou:
kemer a ra e bried en e di, hag e mired a ra gwerhez.
25. P'he-deus-hi laket er béd eur mab,
e ro dezañ an ano a Jezuz.

2

ALLELUIA

Eüruz oh, Gwerhez Vari,
o veza m'ho-peus kredet e vefe sevenet
penn-da-benn ar homzou lavaret deoh,
a-berz an Aotrou Doue. Luk. I/45

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze. 2/13-15 19-23

13. Goude ma oa eet kuit ar Vajed,
setu m'en em ziskouezas eun el d'an Aotrou da Jozef dre e gousk,
hag a lavaras dezañ:
- Sav! Kemer ar bugel hag e vamm,
ha teh da vro-Ejipt;
hag e chomi eno beteg ma lavarin dit;
rag Herodez a zo o vond da glask ar hrouadur,
evid e lakaad d'ar maro.
14. Sevel a reas Jozef, kemered gantañ ar bugel hag e vamm,
e-kreiz an noz hag en em dennas en Ejipt.
15. Chom a reas eno beteg maro Herodez,
evid ma teufe da wir ar pezh e-noa lavaret an Aotrou,
dre gomzou ar profed: Euz an Ejipt em-eus galvet va mab.

19. Goude maro Herodez,
setu m'en em ziskouezas eun el d'an Aotrou
da Jozef dre egousk, en Egipt
hag e lavaras dezañ:
20. - Sav, kemer i
ganit ar Bugel hag e vamm,
ha kae da vro Israel; rag maro int ar re a glaske
lemel e vuez digand ar bugel.
21. Sevel a reas Jozef, kemer gantañ ar Bugel hag e vamm
ha dond endro da vro Israel.
22. Med, o klevet edo Arkelaouz roue bro-Israel e plas Herodez, e dad,
e savas aon gantañ da vond di;
aliet dre e gousk eh en em dennas e korn-bro Galilea.
23. Hag e teuas da jom en eur gêr anvet Nazared,
evid ma teufe da wir ar pez a oa bet lavaret gand ar brofeted:
Nazarean a vo greet anezañ.

2a

ALLELUIA ! Eüruz an dud a zelaou
komzou Doue hag a vir anezo. Lk II/28

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze. 12/46-50

46. O komz d'an dud edo c'hoaz Jezuz,
pa zigouezas e vamm hag e vreudeur;
er porz e oant chomet
hag e klaskent komz outañ.
47. Dond a reer da lavared dezañ:
- Aze er mêz, ema da vamm ha da vreudeur,
o klask komz ganit.
48. D'an hini e-noa roet ar helou-se dezañ,
Jezuz a respontas:
- Piou a zo mamm din ha piou eo va breudeur ?
49. Hag en eur ziskouez e ziskibien gand e zorn,
e lavaras:
- Setu va mamm ha va breudeur.
50. rag an neñ piou bennag a ra bolontez va zad,
a zo en neñvou,
hennet a zo breur ha c'hoar ha mamm din.

Alleluia ! Me ho salud, Mari, leun a hras,
An Aotrou a zo ganeoh;
benniget oh dreist an oll gwragez.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz. 1/26-38

26. En amzer-se, e oa bet kaset an El Gabriel gand Doue d'e ur gêr a Vro-Halilea anvet Nazared,
27. da gaoud eur plah yaouank dimezet d'eun den anvet Jozef, euz ligned David.
Hag ano ar plah yaouank a oa Mari.
28. Erruet beteg enni, an êl a lavar:
- Me ho salud, leun a hras,
an Aotrou 'zo ganeoh.
29. Hi a zav strafuill enni o klevet seurd komzou;
soñjal a ra ganti heh-unan petra 'hell beza ar zalud-se.
30. An êl a lavar dezi:
- Na gemerit ket aon, Mari,
rag plijet oh da Zoue.
31. Setu emaoñ o vond da gonsevi,
hag e vlot mamm d'eur mab,
a roïot dezañ an ano a Jezuz.
32. Hennez a vo braz, hag anvet e vo Mab da Vestr an neñv;
an Aotrou Doue a roïo dezañ kador-roue (TRON) David e dad;
33. roue e vo war ligned Jakob da viken,
hag e rouantelez ne vo fin ebed dezi.
34. Lavared a ra Mari d'an êl:
- Penaoz e hoarvezo kement-se ?
gwerhez oh hag e choman.
35. Respont a ra an êl dezi:
- Ar Spered Santel a ziskenn warnoh,
ha galloud Mestr an Neñv a holoio ahanoh.
Dre-ze, ar hrouadur a vo santel ha mab da Zoue e vo anvet.
36. Ha setu Elizabed, a zo kar deoh, he-deus konsevet ive,
daoust d'he oad, hag ar hwehved miz eo eviti,
goude ma lavarar ne vo morse mamm.
37. Rag Doue n'eus netra dreist e halloud.
38. Mari a lavar neuze:
- Setu servichérez an Aotrou:
ra vo greet din evel m'ho-peus lavaret.
Hag an êl a ya kuit diouti.

ALLELUIA !

Eüruz oh, Gwerhez Vari,
o veza m'ho-peus kredet e vefe sevenet
penn-da-benn ar homzou lavaret deoh
a-berz an Aotrou Doue.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz. 1/ 29-47

29. Mari a zav strafuill enni, o klevet seurd komzou,
ha soñjal a ra ganti heh-unan petra 'hell beza ar zalud-se.
30. An êl a lavar dezi:
- Na gemerit ket aon, Mari,
rag plijet oh da Zoue.
31. Setu emaoñ o vond da gonsevi, hag e vlot mamm d'eur mab,
a roïot dezañ an ano a Jezuz,

32. Hennez a vo braz,hag anvet e vo Mab da Vestr an neñvou, 29/133
ha dezañ e roio an Aotrou Doue kador-roue(TRON)David,e dad;
33. roue e vo war llinez Jakob da viken,heb fin ebed d'e rouantelez.
34. Lavared a ra Mari d'an el:
- Penaoz e hoarvezo kement-se ?
Gwerhez on hag e choman.
35. Respont a ra an el dezi:
- Ar Spered Santel a ziskenno warnoh,
ha galloud Mestr an neñvou a holoio ahanoh.
Dre-ze,ar hrouadur a vo santel,ha Mab da Zoue e vo anvet.
36. Ha setu Elizabed,a zo kaer deoh;
he deus konsevet ivez,daoust d'he oad,
hag ar hwehved miz eo eviti,goude ma lavarar ne vo morse mamm.
37. rag Doue n'eus netra dreist e halloud.
38. Mari a lavar neuze:
- Setu amañ servichérez an Aotrou:
ra vo greet din evel m'ho-peus lavaret.
39. En mazer-se(goude beza bet ar helou digand an El),
Mari 'zo eet en hent gand mall,warzu bro ar menezioù,
d'eur gêr a vro-Juda .
40. Antreal a ra e ti Zakari ha saludi Elizabed.
41. Kerkent ha m'he-deus Elizabed klevet ar zalud gand Mari,
e-neus tridet ar hrouadur en he hreiz,
hag eo bet karget Elizabed euz ar Spered Santel.
42. Savet he-deus he mouez,da lavared a-bouez-penn:
- Benniget oh-hwi dreist an oll wragez,
ha benniget eo ar frouez euz ho korv!
43. Hag a beleh e teu din kement-mañ:
mamm va Aotrou o tond beteg ennon ?
44. Rag,kerkent ha m'he-deus mouez ho salud skoet va diskouarn,
e-neus ar hrouadur tridet em hreiz gand al levenez
45. Euruz an hini he deus bet feiz ha kredet e vo sevenet penn-da-benn
ar homzou lavaret dezi a-berz an Aotrou Doue.
46. Ha Mari d'he zro a lavar:
- Meuleudi a gan va ene d'añ Aotrou,
47. ha tridal a ra va spered gand Doue,va Zalver,

ALLELUIA

Eüruz oh,Gwerhez Santel
ha teir gwech din a bep meuleudi,
rag m'eo savet diwarnoh Heol ar justis,
ar Hrist,on Doue.

Aviel Jezuz Krist,hervez Sant Lukaz. 2/1-14)

1. En amzer-se,e oa deuet urz a-berz an impalaer Aogust
da niveri oll dud ar béd.
2. An niveradur kenta-se a oe greet,pa oa Kiriniuz gouarnour Bro-Siria.

3. Mond a ree an dud da rei o ano, peb-hini en e gêr.
4. Jozef ive, euz Nazared e bro-Halilea, a oa pignet da Vro-Judea, beteg kêr David, anvet Betleem, pegwir a oa euz ti ha familh David.
5. Evid rei e ano gand Mari, e bried, a oa dougêréz.
6. Epad m'edont eno, setu deuet an amzer dezi da henel he bugel.
7. He Mab kenta-ganet he-deus neuze laket er béd, mailluret ha laket da hourvez en eur hraou, dre ma ne oa ket a blaz evito en ostaleri.
8. Pastored a oa er mêziou tro-war-dro, o veilla 'hed an noz da ziwall o deñved.
9. Ha setu eun êl a-berz Doue en em ziskouez dezo, ha gloar Doue a daol sklerijenn en-dro dezo, hag int da veza spontet.
10. An êl a lavar dezo:
- Chomit heb aon, rag kelou a zigasan deoh euz eul levezet vraz, a vo evid ar bobl a-bez:
11. Eur Zalver a zo ganet deoh, hirio, e kêr David: ar Mesiaz eo, an Aotrou.
12. Ha setu ar merk a raio deoh e anaoud;
c'hwil 'gavo eur hrouadurig mailluret ha gourvezet en eur hraou
13. Ha neuze, en eun taol, e teu da heul an êl eun niver braz a Elez euz an neñv, oll o veuli Doue, en eur lavaret:
14. - Gloar da Zoue e barr an neñvou, ha pech war an douar d'an dud a blij dezañ.

7

ALLELUIA ! Eüruz oh, Mari, Gwerhez Santel
ha teir gwech din a beb meuleudi;
rag m'eo savet ahanoh Heol ar justis,
ar Hrist, on Doue.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz 2/27-35

27. Deuet eo Simeon d'an Templ, poulzet gand ar Spered, pa oa tad ha mamm ar mabig Jezuz o tigas anezañ, evid ober en e geñver kement a zo diouz giz al lezenn.
28. Kemer a ra ar hrouadur etre e zivreh, ha bennoz a lavar da Zoue, o lavared:
29. - Bremañ, va Mestr, e hellit lezel ho servicher da dremen e peoh, hervez ho promesa;
30. rag gwelet o-deus va daoulagad ho silvidigez,
31. an hini a zo bet prepetet ganeoh da ziskouez d'an oll vroadou,
32. sklerijenn war boblou ar bayaned da deurel sklerder ha gloar evid Israel, ho pobl.
33. Estlammi a ree e dad hag e vamm gand kement a glevent lavared diwarbenn ar bugel.
34. Simeon a ro dezo e vennoz hag a lavar da Vari, e vamm:
- Setu ema ar hrouadur-mañ er béd,
evid koll hag evid silvidigez kalz a dud en Israel,

- ha da veza eur zin hag a zavo enebiez war e dro.
35. C'hwil hoh-unan a vo treuzet ho kalon gand eur hleze,
e seurt ma vo diskuillet ar zoñjou kuzet e kalonou kalz a dud.

6

ALLELUIA !

Eüruz ar Werhez Vari
a zalhe mad Komz Doue en e halon
hag a zoñje enni.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz. 2/15b-19

15. Goude ma oa tehet an Elez diwar o zro,
ar bastored a gomze etrezo:
- Deom beteg Betleem da weled ar pezh a zo c'hoarvezet,
ar pezh a zo bet diskleriet deom gand an Aotrou.
16. Mond a reont buan, hag e kavont Mari ha Jozef,
gand ar hrouadur gourvezet er hraou.
17. Goude beza gwelet, e reont da houzaout ar pezh e oa bet lavaret dezo
diwarbenn ar hrouadur-se.
18. Ha kement hini a gleve a oa souezet
gand ar pezh a gonte dezo ar bastored.
19. Mari a zalhe mad an oll draou-se en he halon
hag e zoñje enno.

8

ALLELUIA !

Eüruz ar Werhez Vari,
a zalhe mad Komz Doue en he halon
hag a zoñje enni.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz. 2/41-52

41. Kerent Jezuz a ree beaj Jeruzalem,
bep bloaz, evid gouel braz ar Pask.
42. P'e-neus bet Jezuz e zaouazek vloaz,
ez int pignet da Jeruzalem,
evel ma oant boazet, evid ar gouel.
43. Echu ganto o devezioù, o deus kemeret hent ar gêr,
med ar paotr Jezuz a zo chomet e Jeruzalem,
heb gouzaout d'e dud.
44. Kredi a reont ema gand ar re all euz ar gompagnunez,
hag evel-se e reont eun derveziad hent;
neuze e klaskont war elerh, e-touez o zud kar hag o anaoudegez.
45. Chomet berr d'e gavoud, e teuont war o hiz da Jeruzalem,
da vad ouz e glask.
46. Ha setu goude tri devez,
e kavont anezañ en Templ,
azezet e-kreiz an doktored,
o selaou hag oh ober goulennoù.
47. Kement hini a glev anezañ a jom souezet
gand e skiant hag e respònchoù.

48. Ouz e weled, e dud a zo estlammet, hag e vamm a lavar dezañ:
 - Va mab, perag ho-peus greet an dra-ze deom ?
 Setu ez oam, ho tad ha me, ankeniet braz ouz ho klask.
49. Eñ a lavar dezo:
 - Petra ho-poa da glask war va Ierh ?
 Ha ne ouieh ket e tlean beza e ti va zad ?
50. E dad hag e vamm o-unan n'int ket evid intent
 ar pezh e-neus lavaret dezo.
51. Diskenn a ra ganto euz Jeruzalem,
 evid distrei da Nazared,
 ha dalhmad e chom sentuz outo.
 Hogen, e vamm a vire an oll draou-se en he halon.
52. Jezuz, eñ, a greske e peb doare: furnez, ha korv, ha gras,
 dirag Doue ha dirag an dud.

ALLELUIA. Eüruz an dud a zelaou
 komzou Doue hag a vir anezo. Luk. I/28

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz. 2/27-28

27. Eun deiz m'edo Jezuz o prezeg d'eun niver braz a dud,
 setu eur vaouez o sevel he mouez a-douez ar bobl da lavared:
 - Eüruz ar vamm a zo bet ouz ho tougen hag ouz ho maga
28. Ha Jezuz a respont:
 - Gwelloh c'hoaz: eüruz an dud a zelaou komzou Doue,
 hag a vir anezo.

ALLELUIA. Eüruz oh, Gwerhez Vari,
 c'hwil hag ho -peus kredet e vefe sevenet
 penn-da-benn ar homzou lavaret deoh,
 a-berz an Aotrou Doue. Luk. 2/II

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Lukaz. 2/I-II

1. En amzer-se, e oa deuet urz a-berz an impalaer Aogust
 da niveri oll dud ar bed.
2. An niveradur kenta - se oe greet pa oa Kiriniuz gouarnour Bro-Siria.
3. Mond a ree an dud da rei o ano peb-hini en e gêr.
4. Jozef ive, euz Nazared, e Bro-Halilea,
 a oa pignet da Vro Judea,
 beteg kêr David, anvet Betleem, pegwir e oa euz ti ha familh David.
5. Evid rei e ano, gand Mari, e bried, a oa dougêrez.
6. Epad m'edont eno, setu deuet an amzer dezi da henel he bugel.
7. He mab kenta-ganet he-deus laketa er béd,
 mailluret ha laketa da hourvez en eur hraou,
 dre ma ne oa ket a blaz evito en ostaleri.
8. Pastored a oa er mêziou tro-war-dro,
 o veilla 'hed an noz da ziwall o deñved.
9. Ha setu eun êl a-berz Doue en em ziskouez dezo,
 ha gloar Doue a daol sklerijenn en-dro dezo,
 hag int da veza spontet.

10. An el a lavar dezo: evid an aviel
 - Chomit heb aon, rag kelou a zigas an deoh
 euz eul levez vraz, a vo evid ar bobl a-béz:
11. Eur Zalver a zo ganet deoh hirio, e kêr David;
 ar Mesiaz eo, an Aotrou.

ALLELUIA !

Eüruz ar Werhez Vari,
 hi hag he-deus meritet palm ar verzerenti,
 e-harz kroaz an Aotrou.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Yann. 19/25-27

25. En o-zav, e kichen kroaz Jezuz edo e vamm,
 ha c'hoar e vamm, Mari, gwreg Kleofaz, ha Mari-Madalen.
26. Jezuz o weled e vamm hag en he hichen an diskibl a gare,
 a lavar d'e vamm:
27. - Maouez, setu ho Mab.
 Da houde e lavar d'an diskibl:
 - Setu ho mamm !
 Hag azaleg neuze e kemeras an diskibl anezi en e di.

0 0 0
 0